



- 100 -

enn eunn dra all° ne larann ket  
 enn eun dra all° m'ho sikouro  
 hep damant d'am c'horf, d'am mado.

° a-us : eur c'hiz  
 ° a-us : eur c'hiz

z-ann da di va merc'h Enori.  
 penaoz kredinn-me mont d'hezi  
 Biskoaz vad m'euz graet dezhi  
 nemet he c'has er meaz va zi  
 Lammet he madou diganthi

- Bonjour d'hoc'h va merc'h Enori  
 deuet ounn d'ho kwelet d'ho ti,  
 pa ne deuit ket d'am hini  
 - Ha dehoc'h 'mezhi, va zad Roue,  
 petra eo ar c'helou neve ?

- Me zo poaniet gant ar c'hlenved  
 hag e lavar an doktoret  
 gant eur vronn werc'h em be iec'hed  
 digant unan euz va merc'hed.

- Na pa ve skuilla va holl goad  
 'vidoc'h, va zad me rai peb vad  
 it 'ta aze war ho taoulin  
 va bruched d'hoc'h a zizoloinn.  
 N'oa ket he bruched dizoloet,  
 he bronn gant eunn aer zo eet.

-----

Enori eno a ouele  
 ha den ebed n he frealze  
 'met he zad roue a ree.  
 Hen a lare dezhi bepred :  
 - Tavit, va merc'h, na ouelit ket,  
 me wel eunn eal tont d'ho kavet  
 enn he zourn ganthan eur vronn skler  
 a vezo d'hoc'h da vizilouer.  
 Brema, Enori, m'ho timezo  
 da gaera map a zo er vro,  
 da gaera map vezo kavet  
 vit ar wella euz va merc'hed.

-----

Demezet oa hag eureujet  
 bet eur pennad gant he fried  
 ken zeu he mamm gaer da laret :

- 101 -

( Guerz Santez Enori )

- va map te a zoug eur bonned.

-----

- Tavit, va mamm, na lirit ket.  
 eur werc'h a zoare amez bet,  
 eur werc'h a zoare amez bet  
 den 'bet ganthi n'hoc'h euz gwelet.

-----

-den 'bet er gamp n'am euz gwelet  
 er solier ne lavarann ket.

-----

- Bonjour dehoc'h, va zad-kaer Roue,  
 ha dehoc'h, va map Guezo, ive.  
 petra eo ar c'helou neve ?  
 - petra rafac'h, din leveret,  
 d'eur c'hrek he deje daou bried ?  
 - Barn 'nezhi da veza krouget  
 pe d'an tan da veza devet  
 he barn /da veza devet en tan/° ° a-us : na da zevi enn  
 hennez zo eur maro buhan. tan

- M'ho pe gwezet, n'ho pe laret.  
 Enori eo hoc'h euz barnet.  
 - Mar deo Enori m'euz barnet  
 eur barn neve a vezo gret.  
 Ober dezhi un donel neve  
 he leuskel er mor, enn han Doue !  
 Guezo eun deiz a c'houlenne  
 oc'h merdaïdi seis vloaz goude.  
 - Merdaïdi, din leveret,  
 n'hoc'h euz gwelet tonel ebed ?  
 - Klasket neb en deveuz kollet.  
 n'hon euz gwelet tonel ebet  
 'met tonel santez Enori  
 a zo diskennet er Merdri.  
 Ni ia bemdez d'he saludi.

-----

Santez Enori a ouele  
 ha n'oa den he frealze  
 met he map hennez a ree  
 hennez a lavare bepred :  
 - Tavit, va mamm, na ouelit ket  
 'ma erru va zad d'ho kwelet,  
 erru d'ho kaout, d'ho klask d'ho ti  
 ha da vort ganthan d'he hini.  
 - Penaoz anavezez da dad ?  
 N'ec'h euz gwelet he zaoulagad.

- 102 -

- Bonjour, Enori, va fried  
 c'houi 'glaskan dre pep bro er bed  
 Setu me deut d'ho kaout d'ho ti  
 da c'hout ha c'houi deui d'am hini.  
 Abaoue m'omp hon daou kwiteet  
 kalz gwall-heuriou zo c'hoarvezet,  
 va maneriou zo diskaret,  
 ar gwez enn dro zo displantet,  
 va mam gant ann diaoul zo eet  
 /Mar karje oa kuit/° a gement-se ° a-us: kuit vije bet  
 beza laret ar virione.  
 Setu gwerz santez Enori  
 nep n'he goar ket sonjet ennhi.

vvvvvvvvvv